




Un taol-diskar Stad a voe aozet get Louis-Napoleon Bonaparte nebeut a-raok fin e gefridi d'an **2 a viz kerzu 1851.**

Taol diskar-Stad get Louis-Napoleon Bonaparte, d'an 10/12/1848

III. An Illvet Impalaeriezh 1852-1870

A. Betek 1860: renad aotrouniek

Ar frankiz diazez(emvodiñ, embann...) a voe strishaet kenañ. Harzet e veze an enebourien pe kaset d'an harlu (Victor Hugo).

B. A-dal 1860, renad liberaloc'h: ar gwir ober harz-labour a voe aotreet e 1864, al lodenn vras ag ar frankizoù embann hag emvodiñ adsavet.

C. Oberoù an Eil Impalaeriezh:


➤ Diorren an ekonomiezh: krouet e voe bankoù, kresket e voe ar rouedad hentoù-houarn (3600 da 16 000 km). Sinet e voe **un emglev frankeskemm** get RU a-benn tenniñ ar gwirioù maltouterezh etre an div vro.

➤ Al labourioù bras: e Pariz e voe adsavet ar gêrbenn en ur doullañ balioù ledan, sevel tachenoù glas, sevel savadurioù nevez el an Opera, an tier-gar (Montparnasse, Lazare, Lyon, Orleans...) Renet e voe al labourioù get **Haussmann**, prefed.

Adkoadet eo ar rannvro "les Landes" hag ar "Sologne".

D. Muioc'h-mui **a enebiezh republikan** ha brezel enep da Brusia e 1870.

Diell 7



Bale Opera e Pariz goude labourioù Haussmann

Diell 8



13.Penaos en deus Napoleon III modernizet ar vro? Roit 3 skouer.....

14. Hervez an dielloù petra eo poentoù pozitivel ha negativel ar renad Napoleon III?.....

Diell 9:Etre 1866-1870, meur a enkadenn diplomatek a darzhas etre Frañs ha rountelezh Prusia hag e miz Gouere 1870 e tisklêrias Napoleon III ar brezel da Brusia. Met he doa Prusia prientet mat ar brezel: Aloubet e voe Frañs, kelc’hiet eo an arme ha d’an 2 a viz Gwengolo 1870 e voe bac’het Napoleon III e Sedan. A-dal miz Here 1870 evoc kelc’hiet Pariz get an arme prus hag e voe tizhet get an naonegezh. Evit difenn ar gêrbenn e voe ar gouanamant nevez roet armoù d’ar boblañs a-benn he difenn ha krouet ur “ gward broadel”. E miz Genver e voe Sinet an arsav-brezel get Prusia hag e voe kapitulet e miz Mae 1871 ; Koll a reas Frañs Elzas-Loren hag e rankas paeañ digolloù spontus a 5 miliard a lurioù aour da Brusia. met ar boblañs parizian a nac’has an droukziwezh hag e kasas an emsavadeg “**la Commune**”, evite e voe treitouriezh. Etre an 21 hag ar 27 a viz Mae 1871 e voe frastret an emsaverien; etre 20 000 ha 30 000 emsaver drouklazhet ha 50 000 bac’het ha barnet, kaset er galerioù en trevadennoù Embannet e voe an Illvet Republik .

15. E 1870 perak e voe Frañs er brezel?.....

16; perak he doa Bro C’hall kollet ar brezel?.....

17. Perak e voe roet armoù d’ar Barizianed?.....

18. Perak e nac’has ar Barizianed roiñ en-dro an armoù?.....

Diell 10: Ar C’humun
E miz C’hwevrer 1871, ur Vodadenn vroadel a voe dilennet er vouzhiadeg hollek. Ul lodenn e voe evit ur vonarkiezh hag ne rae ket fiziañs d’ar bobl. En em staliiñ a reas ar Vodadenn e Versailles hag e tivizas disarmiñ ar bobl a Bariz: divodet eo voe ar gward broadel. D’an 18 a viz Meurzh 1871, an arme feal d’ar Vodadenn a zivizas adkemer ar c’hanonoù lec’hiet tro-dro d’ar c’hêrioù. Doc’htu e tarzhas un emsavadeg er c’harterioù hag e rankas an arme tec’het kuit. D’an 26 a viz meurzh e tilennas ar boblañs parizian ur “ C’humun” , ur seurt gouarnamant dispac’hourel a gemeras divizoù evit ar re baour hag ar vicherourien. Etre 21 hag an 28 a viz Mae 1871, e-pad ar “sizhuniad wadek” e voe pilet ar c’humun get an arme hag e krogas bec’h etre ar Versailhiz hag ar C’homunourien. Etre 20 000 ha 30 000 komunour e voe drouklazhet e-pad an emgannoù. 50 000 arall a voe harzet ha barnet

19. E 1871, petra a zivizas ar Vodadenn nevez?.....


20. Petra a voe emzalc’h ar bobl Pariz?.....

21. E Mae 1871 piv a voe ar Versailhiz?.....

22.Piv a oa ar C’humunourien?.....

23. Ar-lerc’h ar sizhuniad wadek piv a voe trec’h?.....

Diell 11:Lazhadenn emsaverien ar C’humun



IV. An Trede Republik (1870-1914)

A. Ar reformoù

Document n°1 : Les lois sur l'éducation, entre 1881 et 1886.

"Le maître d'école ne percevra plus de rétribution scolaire au sein des écoles primaires publiques, ni dans les classes maternelles."
"L'instruction primaire est obligatoire pour les enfants des deux sexes de six à treize ans."
"Dans les écoles publiques, l'enseignement est désormais exclusivement confié à un personnel laïque."

Document n°2 : Un ancien élève raconte la passage à l'école laïque (1882).

"Dans notre salle de classe, le crucifix, l'image de la Vierge, les pieuses sentences inscrites sur les murs ont été enlevées. Le maître a commencé sa classe sans invoquer le nom de Dieu ; et si quelque écolier a fait par habitude le signe de croix, il a été repris aussitôt et peut-être puni. Pour le début, un commentaire sur la Déclaration des Droits de l'Homme et un éloge du régime républicain ont remplacé la leçon de catéchisme et d'histoire sainte."

Document n°4 : "Le français pour tous", souvenirs d'un écolier breton vers 1900.

"A l'école, nous n'entendons que du français, nous devons répondre avec les mots français que nous attrapons. Nous lisons, nous écrivons en français (...). A la fin, il y aura un certificat d'études qui est bien plus dur que celui de la première communion. (...) Nous nous mettons bientôt à la torture, bourrés de bonne volonté, pour fabriquer de petites phrases en français. Est-ce notre faute si des mots bretons se glissent dedans ? Quand le maître assène un coup de règle sur la table, nous savons que nous avons failli. Il reprend la phrase avec le mot français. « J'ai vu eur c'hwede ce matin », dit l'un de nous. Le maître écrit au tableau : une alouette. Répétez : « J'ai vu une alouette ce matin. »

24. Diell 1: adskrivit ar frazenn a ziskouez emañ daet da vout laik ar skol.
25. Evit piv e teuas da vout digoust ar skol?.....
26. Diell 2: penaos e teuas da vout laik ar skol?
27. Diell 4: petra eo anv an diplom tremenet e fin ar skol kentañ derez?.....
28. Diell 4: petra a rankas ar skolidi breton ober da gentañ?


E-penn kentañ an Ilvet Republik e rae ket fiziañs ar boblañs d'ar republik goude c'hwitadenn an div republik. Met a-drugarez da gannaded republikan (Leon Gambetta ha Jules Ferry) e voe kaset da benn reformoù bras evit skigniñ ar spered republikan.

Adsavet e voe **ar frankizoù**: kelaouiñ, kengrediñ, aotre ar sindikad (1884)...

Etre 1881 ha 1884 e voe al lezennoù Ferry evit ur skol kentañ derez laik, digoust ha ret betek 13 vlez.

E 1905 e voe votet ul lezenn **an disrann etre an Ilizoù hag ar Stad**.

B. An afer Dreyfus



Diell : Frañs rannet e daou

E 1894 e oa tamallet ur c'habiten elzasat ha yuzev **Dreyfus** bout treitour, pourchaset m'en dehe bet titouroù milourel d'an Alamagn. Lakaet kablus get al lez-varn vilourel e oa bet dic'haloñset ha kondaonet d'ar galeoù. Met e 1898 pa voe dizoloet un den kablus e gwirionez, e kavas an arme gwelloc'h didamalliñ hennezh kentoc'h evit anzav he fazi. Get ar skrivagner brudet **Zola** e voe diskuliet fazi ar justis e-keñver Dreyfus , e-barzh l'Aurore en ur skriviñ ur pennad "**J'accuse**". Neuze, e voe dispartiet ar vro e daou du: ar re enep da Dreyfus, alies enepyuzevien, ne faote ket dezhe asañtiñ d'ur prosez nevez a c'hellehe gwanaat an arme c'hall. Ar re arall a oa tud a-du get Dreyfus a faote dezhe e vehe adwelet ar prosez ha doujet d'ar wirionez. Advarnet e voe Dreyfus ha kondaonet get ul lez-varn vilourel met digastizet e voe get ar gouarnamant.

29. Da betra e oa kondaonet Dreyfus?
30. Piv a oa ar re evit Dreyfus? Ar re enep?
31. Emile Zola e oa evit pe enep Dreyfus? Petra en deus graet?